

Merc'het yauank, en gourione
Mert d'unan ma ret promesse.

an ini rei da daou pe dri
a iel dan ifern da leskiñ.

an ini rei da dri pe pewar
a vo danvnet hep e nep mar.

a vo deus Doue distag a gren
Evel eur scour deus eur woën.

En en dont deus al leur newe
Me a moa groet sei's promesse

Seis promesse e moa me groet
Kerkouls mije groet an eisvet.

Da seis den yauank a moa touet
Kemerjent a ne wit pried. (1)

Yan Gornek wa bars em genou
C'hober widon promesseou.

Pa wa gant en hent o vonet
Eu(r) c'halavier deus rancontret.

– Plac'hek yauank, dime leret,
Tresek pet bro velse e c'het ?

– Me ia breman da Wengamp
Da brenan 'n allianç arc'hant.

A neuse dabrenan eur ruban :
Ganac'h, cavalier, so unan.

– ma ruban o po mar keret
mar keret bean ma fried

Bean groek dime ewit mad
hag hen sinan din gant ho goad.

sinan din gant eur benduen
E vefet din ewit biken.

— Plijout ' wallac'h ra ho feçon
Chetu ase ma dorn, mignon.

ha dillun gentan mar keret
Otro kabiten vo' hon eured.

Eis kemener a so em zi
O c'hober eun habit newe diñ.

Arc'hoas martese a vo nao
Red vro (2)d'ho kroëk bean faro.

Penneres ar Woern a levere
Er ger de douç pa narie :

— Deus gane duman dar jardin
d'ober eur boket louzou fin.

— Merc'hek yauank, ma escuset
Dar jardin ganac'h man nin ket

Rag ar jardin so biniget
ha c'hui ha me, niñ na nomp ket.

Er jardin so eul louzouen
Zo c'hano Jesus war he fen.

hano Jesus so war he fen,
hano Mari war he dellien.

— Ma mam, mes aoun c'hon manket
komer hennes evit pried

He visaic'h blij din awallac'h
Mes he dreid so vel treit eur marc'h.

– Laret moa dac’h, ma merchek koant,
choas eur pried herve ho c’hoant.

Tolet plê pe choaset unan
ho kaçfe da lesquin dan tan.

Pa nantreent dre an hor vras
An dud a eured awa flambras.

Dre m’antreent bars an ilis
Te n’ho c’herc’hen eur vrumen vris.

ben n’arujont d’ar balustrou
E waint ho daou du evel glaou.

Er belek yauank a c’houlene
deus Penneres ar Wouern neuse :

– Merc’hek yauank, dime leret,
Petra ganac’h so ariet ?

Petra ganac’h so ariet,
Du ho kavan vel er pec’het.

– Belek yauank, mar em c’heret
Er stoll em c’herc’hen a lekefet,

me sant er vero bars em esquern
Mes aouen c’hon a vont dan ifern.

me sant an tan em daoulagad
a c’han da dêvin kik ha goad.

N’wa ket er (3)gir perachuet
An douar d’ho treit so diorret,

seiz leo tro rond a we cleowet
gant eun drous effroyab meurbet

We cleowet pennerez ar Wouern
O koean ’n fons puns an ifern.

Il n’y a pas de titre dans le ms. Variante de «Ar godisserez».

(1) a (de ane) a été ajouté ; -p (de pried) écrit en surcharge sur un f.

Le folio 130 v. est paginé 2 par Penguern ; le folio 132 v., paginé 3 ; le folio 134 v., paginé 4 par Penguern.

(2) Ms. : vro ; lire : vo.

écriture de Kerambrun.

(3) er, écrit en surcharge sur he.